

KOV GWILLOU VIHAN A RA TROUZ

An ti-gar. Eun treñ o c'hwitellad).

Jakez

Hastom buan, Gwillou Vihan, peotramant ni a jomo war-lerh an treñ. Seiz kant boulien, gwelloh e kavfen kaoud eun hanter-dousenn a vugale en-dro din eged kaoud ahanout da ruza ha da zevel da fri war beb tra a welez. Digor da veg 'ta, genaoueg !

Gwillou

Sell 'ta, Jakez, pegement a dud a zo amañ war ar hae. O, siwaz 'ta ! E-giz eun neiz merien emaint. Da beleh an diaoul e ya an dud-se ? Ha pegement a veh hag a bres a zo warno 'ta ! Lavaret e vefe eo peget an tan e foñs o brageier pe e traoñ o lostennou.

Jakez

Istrogell a zen ! Ar re-ze a oar mad penaoz an treñ ne hortoz ket p'eo deut an eur. Eun taol c'hwitell ha kuit ! Gwaz a ze evid ar ruzerien. Ha te, Gwillou, a jomo war-lerh ma kendalhez da drei en-dro da zeuliou da votou e-giz eur gazeg-koad en-dro d'eur wezenn. Deus 'ta ! Eom buan !

Gwillou

Gurun, Jakez, koulskoude an treñ-ze a hortozo ahanom. Ne vez ket leusket an dud war-lerh, nann, er broiou sivilizet, d'an nebeuta. Me anavez mad an hini a zo o kondui an treñ. Hennez a zo mab bihan da Cheñg Lagad-Pikouz ya, Laouig e ano. Daoust ha Laouig a vefe digoustiañs a-walh evid mond kuit heb samma Jakez ha Gwillou war e varh-du ? Eur vez e vefe. Neuze, ne hellfe ket teurel e dreid ken e Poullfaouig, rag e vamm-goz a drohfe dezañ e ziskouarn. Bez dineh, Jakez, Laouig a hortozo ahanom. Ni on-defe amzer a-walh da vond d'eva eur bannig e ti Tof ar Brenn, war blasenn an Amann-Koz.

Jakez

Deus buan 'ta, rever, beg-loar ! Te a gred marteze eun treñ a zo ar memez tra hag eur harr-braz, hañ ! Laouig n'eo ket mestr war an treñ, te oar. Amañ, an eur a zo an eur. Dastum ar valizenn ha deus war va lerh, buan. Gwelloh eo deom beza eur vunutenn bennag er wetur a-raog ar mare da vond kuit, abalamour da gaoud eur plas. Gand kemend a dud, marteze ni a ranko chom a-zav. Ha chom a-zav beteg an Naoned a laka ahanom da erru skuiz-dall. Deus buan !

Gwillou

Jakez, e peleh ema ar boued ganit ?

Jakez

Peseurt boued ?

Gwillou

Ar boued da zebri, evel just. Ni on-do naon du a-raog erruoud en Naoned.

Jakez

Amañ ema, er zah lèr. Hag eur voutailad win da derri ar zehed. Ahanta, pignom er wetur !

Gwillou

Sur out, Jakez ?

Jakez

Sur ouz petra ?

Gwillou

Sur e ya ar wetur-ze d'an Naoned. Eur wech, Pastien an Togn, hag a zo eun digourdi war e veno, a zo pignet en eur wetur e-giz-se evid mond da Bariz hag eo degouezet antronoz e Bourdel, ya, e Bourdel. Setu e welez mad eo red teurel evez. Me n'am-eus ket c'hoant degouezed e Marseill pe e Toulon a-benn warhoaz, nann. Me a ya d'an Naoned da zimezi merh Noelig Pao-Pin.

Jakez

N'en em chalez ket, Gwillou. An treñ-mañ a ya d'an Naoned. Sell, skrivet eo warnañ : "Paris-Montparnasse, via Nantes".

Gwillou

Via, via, daoust ha me oar latin, Jakez ! Med peogwir te eo ar mestr, me a ya da heul e-giz eur hi bihan. Med ma erruom en ivern, warhoaz, te en em ziluzio gand an Diaoul, hañ ?

Jakez

Ya, ya. Pign atao.

Gwillou

Taol evez er zah, Jakez. Me ne fell ket din mervel gand an naon. Ha diwall da zrailla ar voutail ! Mervel gand ar zehed a zo gwasoh c'hoaz.

Jakez

Emaon peg mad er zah. Pign 'ta, ha klask eur plas e-kreiz ar wetur, 'kichenn ar prenest. Aze m'emaer ar gwella.

Gwillou

A ya ! Ha perag 'ta ?

Jakez

Abalamour, ma tegouez gand an treñ mond a-benn gand eun treñ all, an daou benn deuz ar gweturiou a vez flastret aliezh, med ar hreiz outo a jom madig a-walh. Pign 'ta ! Ema ar chef o vond da hwitellad.

(Eun taol c'hwitell. An treñ a ya kuit).

Jakez

Arsa, Gwillou, emaom azezet dirag ar werenn, Mad an traou. Plas a-walh on-

eus, hañ ! N'emaom nemed pevar er hompartimant. Ni on-daou, eun dimezell hag eun itron. Astenn da zivesker, Gwillou. Arabad kaoud aon. Ne vi ket debret gand an diou vaouez-mañ.

Gwillou

O ! Jakez, me n'am-eus ket aon dirag ar merhed. Abaoe tregont vloaz zo emeon o veva gand Marianna, me am-eus gwelet beb seurt traou. Ha ne gredan ket e vefe dindan an heol benniget gwasoh maouez eged an hini goz, p'eo tagnouz an tamm outi. Nann, n'am-eus ket aon rag an diou-mañ. Med me gav din, an treñ-mañ a ya re vuan. Ma teu eun treñ all dirazañ, ni a vo brevet ken munud hag en eur veill mala kafe.

Jakez

Ne hoarvez ket aliez, Gwillou. Arabad eo soñjal e traou e-giz-se. A-hend-all, den ne bignfe en treñiou.

Gwillou

A dra zur, emaez kalz gwelloc'h war dreid, med n'eo ket brao mond war dreid euz Poullfaouig beteg an Naoned. Forz penaoz, Jakez, pa zoñjan er pezh a hell erruoud ganeom, va zammig bouzellou a ra trouz.

Jakez

Da vouzellou a ra trouz ? Kemend-all a aon az-teus, Gwillou ?

Gwillou

Aon n'am-eus ket. Naon ne lavaran ket. An aon hag an naon n'eo ket ar memez tra, Jakez. Nemed a-wechou, dre forz kaoud aon e paker naon.

Jakez

(C'hoarzin a ra). Te a zo eul lapous, Gwillou. Paka naon dre gaoud aon, setu aze a-walh da vond da anaon, A ! A ! A ! Diwall mad, Gwillou, da vervel gand an aon ha gand an naon.

Gwillou

Emaout adarre oh ober goap ouzon, Jakez Krohenn, den divergont. Beñ, me lavar dit ne varvin ket evid ober plijadur dit. Nann, n'ez in ket da anaon na gand aon na gand naon. Hag evid diwall deuz an aon, me a zo o vond da derri an naon en eur zebri eun tamm hag en eur lonka eul lomm. E peleh ema ar bara, ar hig, ar viou poaz, ha me oar-me ? Tenn ar voutaill er-mêz deuz ar zah. Ma ra trouz va bouzellou, bremañ-touchant e vo mouget an trouz enno. Digor ar zah !

Jakez

Ahanta, Gwillou, n'eo ket deut an eur c'hoaz da zebri. Ugent munud zo az-teus lonket da lein.

Gwillou

Sah an dizienn, Jakez Krohenn, me ne ran ket gand an eur, med gand va bouzellou. Ha bremañ ouzon mad emaint o klemm. Pa ra trouz bouzellou eun den, sur a-walh int goulo. N'ouzon ket petra zo c'hoarvezet, med ma lein a zo

diskennet kalz buannoh hirio eged an deizioù all. Poent eo din karga ar zah adarre, a-hend-all e kouezin e sempladurez war an dachenn. E peleh ema ar bara ganit ?

Jakez

Gwillou Vihan, bez fur 'ta ! N'out ket eur bugel deg vloaz, koulskoude, nann ! Evid peseurt tud e vim kemeret gand an diou itron amañ m'en em lakom da lonka traou, a-boan pignet en treñ. N'eo ket traou d'ober.

Gwillou

N'eo ket traou d'ober ? Daoust hag an diou itron amañ n'o-deus ket naon a-wechou ? Ha petra reont p'o-deus naon, hañ ? C'hwitellad marteze ! Bez' ez eus eul lezenn bennag, Jakez, hag a zivenn ouz an dud debri en treñ ? Itron pe dizitron, Jakez pe Dijakez, Gwillou pe Ziwillou, ar boued a ra d'an dud chom en o zav, ne ra ket ? Pak din ar bara hag ar hig bevin, peogwir n'ema ket ar gwener !

Jakez

Seiz kant boulien, hemañ a zo gwasoh eged eur mousig seiz miz o klask e vronn. Te a lako ahanon da vouga gand ar vez, eur wech bennag. Kemer pasianted ! Sell a-dreuz ar prenest, penaoz ema an douarou war an tu-mañ. Amañ ez eus tachennadou gwiniz ha n'int ket divalo, paotr koz, hag al loened, er parkeier, eo druz ar hig warno. Sell !

Gwillou

N'eo ket an tachennadou gwiniz a ra c'hoant din, Jakez, med ar bara gwiniz, ha pa ne vefe nemed bara heiz-kerh. N'eo ket ar hig beo a zo war al loened a lak ahanon da hlaouri, med ar hig poaz a zo ganit en da zah. Traou war an daol, Jakez !

Jakez

Nann. P'az-to desket penaoz e vez debret heb ober trouz gand da vuzellou. Eun dismegañs eo, Gwillou, pa ne hell ket eun den kas ar boued beteg e veg heb sorohal e-giz eun ohig bihan o furchal en e vaill.

Gwillou

Me ? Me a ra e-giz eun ohig en e vaill gouelien ! Se a zo eur gaou. Me a zo eun den paour med sivilizet, Jakez Krohenn. Taol din eun tamm bara gand eur jekenn gig warnañ ha me a ziskouezo dit penaoz e vez kaset d'an traoñ heb ober muioh a drouz eged askell eul laouenanig.

Jakez

Ya. Hag ar vruzun vara a gouez war an douar en-dro dit, hag an daouarn druz a lous an oll draou en-dro dit, hag ar hloch viou a zo bannet dindan ar bank. N'eus ket eun den war gant hag a oar penaoz e vez debret en eun treñ heb ober loustoni ha reketet an oll dud en-dro dezañ. Ha te nebeutoh eged forz piou, Gwillou.

Gwillou

Sell 'ta ! N'on ket bet pell er skol, Jakez, med n'eo ket red beza desket braz evid gouzoud penaoz debri dirag an dud, nann ! Sertanamant, ne ran e-giz da wreg

Katellig. Honnez, p'emei o tebri eun tamm bara amanennet, a ra eur bern ardou gand he bizied hag he muzellou, ken e hej he diskouarn dindan he hoef gand ar beh a zo warni. Minergez an diaoul ! Med koulskoude, Jakez, me 'oar petra a vez greet gand eur zalviedenn, ya. N'az-to ket mez da gaoud ganin.

Jakez

Marteze. Med an diou itron a zo azezet en tu all a zeblant beza itronezed euz kêr. Ha ne garfen ket e kemerfent ahanom evid tud gouez.

Gwillou

Ha me a ra forz gand an itronezed, Jakez. Petra am-eus d'ober gand an itronezed, me, Gwillou Vihan ? Ar boued a zebran a zo bet gounezet ganin, n'eo ket ? Ha paeet am-eus ma beaj en treñ, n'em-eus ket ? Ouspenn-ze, an diou itron-mañ a zo eun tres plijuz warno, ya. D'am meno, e reont nebeutoh a ardou eged Katellig Krohenn. Sell, Jakez, pa vin kroget da zebri ma zamm bara, me a ginnigo dezo eun tamm ivez. Tenn ar boued er-mêz deuz ar zah. Ma bouzellou a ra kemend a drouz ma kredfed ez eus eun dornerez oh ober an eost dindan va jiletenn. Me rank debri eun tamm, peotramant...

Jakez

Mad ! Setu amañ ar zah hag ar boued. Kemer pezh a garez, stank da vouzellou, lontreg brein. Med me ne chomin ket amañ, gand aon da vervel gand ar vez. Mond a ran d'ober eun dro beteg lost an treñ. Ha kenavo !

Gwillou

Kenavo, memestra. A-benn eur hard-eur, te a hello distrei. Echu e vo ganin. (*E-unan*) Ar Jakez-se a zo eun denig mad, med dallet aliez gand an ourgouill. N'eo ket êz ober gantañ, a-wechou. Ma, gwelom petra 'zo da zebri. O ! O ! Eun anduillenn penn-da-benn, eun troñsad kig leue rostet, eur voutaillad win. Mad-tre ! Ha petra c'hoaz ? Pevar vi kaled. Paotr Gwillou, tenn da gontell ha troh ganti ! Huhhh ! An anduillenn-ze a zo mogedet deuz ar henta. Hag eur c'hwez baradoz ganti ! Eur c'hwez spontuz, leun an treñ. Moarvad e santer he c'hwez penn-da-benn gand an treñ. E ! E ! Ar plah yaouank a daol warni eur zell lintruz ! Honnez a garfe kaoud an tañvad, me a zo sur. Hag an itron ivez, sell 'ta ! Marteze an diou vaouez paour-ze n'o-deus kemeret netra da zebri en treñ. Spontuz eo ! Marteze o-deus naon o-diou. Ha gand ar c'hwez a daol an anduillenn-mañ... Gwillou, ma mab, n'out ket eun den sivilizet ma ne ginnigez ket eun tamm d'an dimezell ha d'an itron.

Hummm ! Ahanta, itron, setu amañ eun anduillenn mogedet e siminal ma zi, ha n'eus ket eun tres fall ganti, neketa ?

An itron

Unan gaer eo, ya, sur. N'am-eus ket gwelet aliez eun anduillenn mogedet ken brao. Ha c'hwez vad a zo ganti.

Gwillou

Ar c'hwez n'eo netra, itron. Ar blaz a zo gwelloh c'hoaz. An anduillenn-mañ a deuz, e-giz amann fresk e genou an den paour. Ma 'peus c'hoant e vo roet eun tañvad deoh.

An itron

Trugarez, aotrou. Debret am-eus va lein a-raog mond gand an treñ. N'am-eus ket naon.

Gwillou

N'eo ket red kaoud naon evid debri eun tammig euz homañ, itron. Nemed eun tañvad. Evid gouzoud penaoz e vez mogedet an anduillennou e Poullfaouig.

An itron

C'hwi a zo deuz Poullfaouig, aotrou ?

Gwillou

Ya, deuz Poullfaouig on. E-kichenn Toull-ar-Heveleg on bet ganet hag aze emañ o chom. Hag aze emañ o soñjal mervel, pa vo deut va zro.

An itron

Neuze eh anavezit marteze Noelig Pao-Pin ?

Gwillou

Noelig Pao-Pin ? Mad-tre ! Ni a zo bugale da gendirvi ha mignoned vad a-viskoaz. Ha dres, emañ war an hent da vond d'an Naoned, da zimezi merh Noelig, a zo eet da jom d'an Naoned pellig 'zo, abalamour emañ o labourad war al linenn-houarn.

An itron

An traou a zegouez mad, neuze. Rag eur mab din a zo o timezi da verh Noelig.

Gwillou

Gand eur mab deoh emañ merh Noelig o timezi ? N'eo ked gwir koulskoude ? Ha me n'anavezan ket ahanoh seurt ebed, ma n'eo ket spontuz !

An itron

N'eur ket gouest d'anavezad an oll dud a zo war an douar-mañ. Klevet am-eus lavared gand ar re goz penaoz n'eo nemed an aotrou Doue, an Diaoul hag an Ankou a anavez peb krouadur beo.

Gwillou

Gwir eo. Cheñg Lagad-pikouz, hag a oar pezh a zo da houzoud etre Toull-ar-Heveleg ha Keribilbeuz, ne ouie ket gand piou e oa merh Noelig o vond da zimezi. Evelato, c'hwi a zo brezoneg mad ganeoh, itron. Kazi sur, c'hwi a zo bet ganet er vro.

An itron

Ya, feiz. E Brest on bet ganet. Va zad a oa deuz Rosko ha va mamm, Doue d'he fardono, deuz kichenn Kastellin. Ouspenn-ze, on bet savet e Montroulez, e ti va mamm-baeron, a-raog mond da hounid va boued d'an Naoned, e leh am-eus kavet va gwaz. Eet on d'e heul d'an Afrik, da Zakar, hag aze eo bet ganet va mab kosa.

Gwillou

Siwaz, biskoaz kemend-all ! Ha n'ho-peus ket kollet ho brezoneg war heñchou ar bed, abaoe keid-all amzer.

An itron

Feiz sur, n'am-eus ket. An hini a goll e vrezoneg goude beza desket anezañ war varlenn e vamm, hennez a zo bet savet diwar lêz treñket. (*C'hoar zadeg*). Va mamm, ivez, a oar brezoneg mad.

Gwillou

Sell 'ta ! Hag ar verh vihan, amañ. Daoust ha gouzoud a ra ar brezoneg ivez ?

An dimezell

Brezoneg a ouzon ivez, aotrou, madig a-walh. Ha koulskoude on bet ganet e Madagaskar.

Gwillou

Souezuz ! Ma ne vijen ket bet azezet mad, e vijen kouezet. E Mada... e Madagaskar. O yaou ! E peleh ema ar vro ouez-se ?

An dimezell

N'ho-peus ket klevet ano deuz Madagaskar ?

Gwillou

Eo, eo. Med me grede din an ano-ze ne oa nemed evid farsal.

An dimezell

Evid farsal ?

Gwillou

Ya. Du-mañ, e Poullfaouig, pa ya an dud da Gemper da glask o "fermis de conduire", e-giz ma vez lavaret e galleg, e vez goulennet diganto, pa zistroont d'ar gêr : « Paket ho-peus ho "madagaskarr" » ?

An itron

Ne gomprenan ket mad.

An dimezell

Na me ne ran ket ivez.

Gwillou

A ! A ! Gwillou Vihan a oar kalz traou, neketa ! Eur "madagaskarr" a zo, e brezoneg, koulz lavared, eur "permis de conduire". Eur "mad da gas karr". Mad da gas eur harr war an hent, eun oto. Mad-da-gas-karr. Ha setu !

O-diou

(*O c'hoarzin*). Ar wech-mañ eo sklêr an traou. Mad da gas karr.

Gwillou

Itron ha dimezell, bremañ e kemerfoh diganin eun tamm euz va anduillenn, hañ ? Trohit hardiz ! Setu amañ ar gontell. Ha bara a zo ivez ganin, kig rostet hag eur voutaillad win. Red eo deom benniga ar gejadenn e-giz homañ.

An itron

Ne lavaran ket nann, rag pellig zo n'am-eus ket debret anduillenn ha va merh n'he-deus ket tañveet morse, koulz lavared.

Gwillou

Kemerit pezh a raio vad deoh. Eun anduillenn e-giz homañ ne vez ket kavet aliez dibaketet e treñiou ar gouarnamant. Trohit diuti, beteg ma ne chomo nemed ar penn-sifelenn. Kemerit bara ivez hag evom assemblez. Me a roio deoh eur werenn da bep hini. Lakeet int bet e foñs ar zah gand Katellig Krohenn.

An itron

Piou eo Katellig ?

Gwillou

Katellig a zo gwreg da Jakez Krohenn.

An itron

Ha piou eo Jakez Krohenn ?

Gwillou

Penaoz ? N'anavezit ket Jakez Krohenn ! Gwir eo, peogwir emaoñ o tond deuz ar broiou du. Jakez a zo ivez o vond d'ar friko. Eñ an hini a zo azezet em hichenn. Med ar paour-kêz a zo klañv beb tro ma pign en treñ. Eet eo da glask eun tammig êr fresk pelloh. Dond a raio en-dro a-barz pell. Debrom atao !

An itron

Mad dreist eo hoh anduillenn, aotrou Gwillou.

Gwillou

Lavaret am-boa deoh ! A genta klas.

An dimezell

Mamm, a-benn eun deg munut bennag e vim erru e Kemperle hag e vo red deom diskenn.

Gwillou

Penaoz ? C'hwi a ziskenn e Kemperle ! Med warhoaz ema ar friko en Naoned, n'ema ket ?

An itron

Eo, sur. Med ma mab a zo o hortoz ahanom e Kemperle, e leh m'on-eus eur voereb koz, re goz evid beaji. Ni a yelo gand eun treñ all d'an abardaez.

Gwillou

Mad-tre. Neuze, warhoaz, ni en em welo c'hoaz. Ma ! laouen braz on da veza

greet anaoudegez ganeoh ho-tiou. Domaj eo n'am-eus mab ebed da zimezi, rag an dimezell amañ a blijfe din spontuz da verh-kaer. Debrit eun tamm c'hoaz, dimezell !

O-diou

(O c'hoarzin). C'hwi a zo eun den plijuz, Gwillou. Ne gaver ket hir an amzer ganeoh.

Gwillou

Na ganeoh kennebeud, itronezed. Bremañ, me a rank dastum piz ar bruzun bara a zo kouezet war an douar, rag Jakez Krohenn, pa deuio en-dro, a zello en-dro dezañ da glask hag-eñ n'em-eus leusket netra da goueza war an douar.

An itron

N'eus bet louzet netra na saotret netra ganeom, Gwillou.

Gwillou

Nann, ne welan ket. Ha lavarit din, itron, etrezom, peogwir en em anavezom madig a-walh bremañ, lavarit din.... eu...

An itron

Petra vo lavaret deoh, Gwillou ?

Gwillou

Hum ! N'ho-peus klevet trouz ebed, pa oan o tebri va zamm boued, bremaig ?

An itron

Trouz ? Peseurt trouz ?

Gwillou

Trouz va genou, ha va dent, ha va lañchenn, ha me 'oar-me. Jakez a bretant penaoz e ran eun trouz spontuz p'emaon o lonka eun tamm bara pe eun tamm kig.

An itron

C'hwi ho-peus debret en eun doare deread ha prop. C'hwi a zo eun den a feson vad.

Gwillou

A ! A ! A ! Laouen braz on, pa glevan kement-se. Eur zamm nebeutoh a zo warnon.

An itron

Ma, poent eo deom prepari an traou da ziskenn e Kemperle, va merh. Kenavo, Gwillou vihan, hag a-benn warhoaz.

Gwillou

Kenavo, ya. Gortozit, ma sikourin ahanoh da ziskenn ho pakajou. Gortoz... gortoz !!!

(C'hwitelladenn. Herzel a ra an treñ. Redeg a ra an treñ en-dro. Gwillou a zo kousket, o rohal).

Jakez

Ahanta, Gwillou, kousket out ? Dihun 'ta, roheller brein !

Gwillou

Pe... petra 'zo ? Kousket on ! N'on ket, emichañs.

Jakez

Kousket e oas. Ha kousked n'eo netra, med rohal a zo vil, Gwillou Vihan.

Gwillou

O, va Doue ! Eüruzamant, an diou all a zo diskennet e Kemperle.

Jakez

An diou itron a oa en da gichenn ? Eüruzamant, ya. Paneve-ze, o-defe kemeret ahanout evid eun den dizoare. Med kazi sur, az-teus debret dirazo en eur ober eun trouz spontuz, ha n'eo ket gwelloc'h eged rohal evel eun hoh gouez.

Gwillou

Debret em-eus prop, Jakez. Sell en-dro dit ha ne gavi ket eur vruzunenn nag eun tamm paper, nag eur vouzellenn anduillenn war an douar.

Jakez

Gwir eo. Evid eur wech az-teus sentet ouzon. Bremañ e hellan debri ivez. Pak din ar zah ! Deut a zo naon din.

Gwillou

Ar zah az-to, Jakez, med ne jom netra e-barz.

Jakez

Penaoz, gourlonker, debrer boued, te az-teus klozet an anduillenn en da vouzellou, diou lur vara hag eun drafad kig rostet !

Gwillou

An itron hag an dimezell o-deus sikouret ahanon kalz, Jakez.

Jakez

An itron hag an dimezell ! Te az-teus kinniget dezo. Ne vez ket greet traou e-giz-se, Gwillou.

Gwillou

Ne vez ket greet traou e-giz-se marteze, med an diou vaouez o-deus debret mad-tre, ken mad ma ne jom ket eur jelkenn war o lerh. Gwaz a ze evidout, Jakez. Ma karfe dit beza chomet ganin, ne vefes ket bet bremañ o furchal en eur zah goulo. Bremañ, te a hortozo beteg an Naoned. Med petra a glevan ?

Jakez

Petra a glevez ? Ma bouzellou oh ober trouz, gand an naon am-eus.

Gwillou

O ! Jakez Krohenn, n'az-teus ket mez ! Eun den sivilizet ne ra trouz na gand e vouzellou na gand e veg.

Jakez

Mad, mad ! Evid eur wech on bet paket ganit, Gwillou Vihan. Me ar zota. Mad a zo greet din.

Gwillou

Dal, Jakezig paour, kemer an dra-mañ, da derri da naon.

Jakez

Petra eo ? Sifelenn an anduillenn ! Gwillou Vihan, te a ra goap ouzon ? Me a daolo ahanout dre ar prenest, sell. Biskoaz kemend-all !

(C'hoarzin a ra Gwillou).